

PLAC'H MANKET

Var eun ton trist.

Selaouit breman va mouez, o va c'hamaradezet,
C'houi pere em vaouankis, a meus bet kals karet,
Eus a Doullic all Ludu, me m'aeoc'h ma c'hlemmou,
Deut holl assemblez ganin, da veski ho daelou.

Me a meuz kollet breman va reputation,
Va c'halon a zo karget ha zezolation,
Dre ma meus kredet, siouas, va faoz kamaradou,
E'meus kollet ar c'haera demeus va bokejou.

Beteg breman me c'halle laret a voues huel,
E oan kaera fumelen e oa e Breiz Izel,
A breman me zo udur etouez an holl verc'het,
Pa eo va c'haera bouket sioas gan-in kolet.

Ne kavin ket enep leac'h, da brema seurt d'ez fian,
Dre veza deut da gredi kamaradet treitour,
E meus lezet va boket da vonet gant an dour.

Pa dean d'examina ar voul rond deus ar bed.
Sioas me wel varnezhi breman kalz a verc'hed
Pere zo kollet gante koulz a me ho rozen,
O veza deut da fiout en komzou treitourien.

Va holl gerent zo sioas gan-in dizonoret,
Va chans a zo dinatur, va flanden kollet
Va c'halon za en hirvoud, kouls en noz vel en de,
Me a c'houlen ar maro, vit 'disken bars em be.

Goude va fragilite, me zo holl ankeniet.
E kompren barz er stad trist, e pehini on rentet,
Beteg breman me meus bet douget kokardeno,
Breman e m'eus eur bizac'h, eur vaz da vont en dro.

Beteg an oad ugent vloaz, me a meus bet bevet
Ebars e doujans Doue, evel ma vez gleet,
Neuze me a moa karet gant an holl em c'hanton,
Neuze, kamaradezet, oa laouen va c'halon.

Goude me meus bet heuliet, kouls en noz vel en de,
Ar gwal kompagnunez, a zo bars en c'hontre
Dre ze me zo mepriset, ebars en reiz Izel.
Ma evrustet, erbed-man, zo eet gant an avel.

Ne meus ket heuliet sioas, avis tad ha mam,
Dre-se ne meus ket gallet beva ive divlam,
Greet a meus skouarn vouzard pa gleven anezhe,
Lavaret zo bet din me gant he sur aliez,

E heul gwal kompagnunez, mije tristedigez.
Mes dre ma oan c'hoas yaouank, veprisen ho c'homzou
A ve ra din-me breman skuil eur mor a zaelou.
Ma mije bet o c'hredet, heuliet ha gourc'hemen.

Va buez, kamaradezet, e vije bet laouen,
Mes pa ne meus ket sentet breman demeus ar stur.
Allaz vit deus ar garek, e rankin ober zur,
Noz a de he m'hon en eur stad trist meurbet.

Awechou me eun tam da zebri gweach all ne me ket,
Goude ma ve erc'h ha scorn, ha ienn bras an avel.
Keunneud ne mo ket d'ober tan da doma va buguel
C'houi, va c'hamaradezet, goude va holl anken.

Deuio c'hoas d'am goapaad, gand eur galon laouen.
Mes mar kemerit an hent, en pehini zo denjer,
C'houi a pezo evel d'hon da zougen bec'h pouner,
Allaz ! kamaradezet, daou hent zo er bed-man.

An hini gemer an hent mad, deus da zougen bech skan.
N'hep gemer an hini fall, bale war va ronjou.
Deus eun pouner da zougen ha kals a dourmanchou,
Vit war va chouck breman, a zo eur bec'h pouner.

Hag a meus deus e zougen, kals a boan a miser.
Dalc'het vezin d'er dougen beteg fin ma deiou,
Adieu 'ta d'am yaouankiz ha d'am plijaduriou.

CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilabuet, ma m' ^{met}.
Chanson an amourousted
A zo gant eus c'hernevad vit an deio composit

Amourousted zo eur guer
Hag a zo dous a tener
Kaus he da vil nec'hamant hag ive da vil mizer

Pa vo an noz pe an de
Daou zen yaouank a goste
Ken ma c'houfeong doare he c'harivo ganthe.

Ar pot a goze brao
Hag ar plac'h a deuz foa.
Evi beza evurus ma fact nemet eun dra
N'eo ket a ra dhe
Dimezi he d'ano.

Pa vouing deve eureuget,
Vad a ra d'he n'em velet,
Casi na ra met unan an ozac'h hag ar vreg.

Keu bras e ar garante
Ha ken bras an amitie
Neuzan eil vit eguil hag an noz hag en de,
He ra deze lavaret
Pell zo cleymp beza dimezet.

Tudou yaouank, me ho ped,
Memes tra divoallet,
Liossoe'h zo dimezet vit a zo ezet.

Gwelet a meuz pa
Kalz a chanclampennoù,
Er menajou e kaver he sort ambarrassou,
Pa zed en tieguezou
Kalz deus a boupenou.

Unan a c'houlen crampoos
Hag eun all galetez.
Eun all zo en he gavel ho klask donet er mes.

Ar vreg zo dre an ti
Vel pa ve etourdi,
Na meus den evit klevet reson vad ebed ganti.
Fached a deus e frik
Adieu d'an amourousted.

Tud yaouank, mar em c'hredet,
Lakaït eves, dionallet.
C'houi a evurussan tud a zo voar ar bed.

C'hui za dre ar pardonïou
Ha dre an assembleou,
O tansal, o c'hebattal, o c'hevan takennou,
Eun den yaouank, mar gue fur
So parfet he blijadur.

Hag ar re zo dimezet
An darn vuyan meus goelet
A vanke eun ~~tra~~ beuzag datc hmad do evurusted.

Darn zo hag a laer ar yalc'h
An darn all e ya war varc'h.
Re all a gar ar chopin, kent azvont mew alwalc'h.
Tud yaouank, mar dimeet
Choaset tud fur ha parfet.

Pa hi Lerer en eun eured a kallerajouti
He neur dont da finissau
Souhaiti ferm a ran
Yec'het d'an daou zen neve, chans a prospérite.

Men ho ped, kamaradet,
Vt eur fars ne fached ket
Permettet e badinal en tre ar vignonnet,

Gras dimp da nem gavet c'hoaz
Joaus evel biskoas
Ben an-den-ma pen eur bloa, ebars ar memes plas,
Ho trinka gant ho goeren
Da yec'het ar poupon.

LENEINDRE.

*Yann
Nan
Nest*